

par M. Fagot  
ancien R. de Garland  
Non imprimé.

Saint Stephan, patron Rouezoc'h

Buez ha Feden

Con: Rouanez Arvor.

Diskan:

Aotrou Sant Stephan, pedit evidomp  
Sikour diganez'h oll a c'houlemomp (bis)

Pesag hon tud koz, I'ar mazer kenta  
Deuz en he Ilis roet ar plus kenta

Sonjal ho doa gret eo tenzor ar Feiz  
Ghella mad ann den zo var Douar breiz

Evit he disual n'hellent kaout quellaoc'h  
Equet Sant Stephan evit Rouezoc'h

Evel ho fatrom, e Karint Doue,  
Ha, ma vefe red, e roint ho bues

Da rann he Ilis Jesus hor Zalver  
A guemer tud praour, da genta Sant Per

Derouez Abostol hag ann Diskipien  
Setu da quenta ann Ilis Kristen

Mez proumt goudeze, dre ho frezeger  
E Konventichout Kalz a Surzevien

Er goumansamont e oa union  
ar memez speret, ar memez calon

Ann oll unanet, pinnidig he paour  
a glaska ato dont d'en em zikour

Disput a zavas etouez ar merc'het  
Pwag lod, emezho a oa dispriset

Ar memez grazer, ho doa aluzen  
Hag eul loden all n'ho devoa taken

Hag ann Ebestellavbaras neuze:  
Hon labour d'emp n'eo Komzou Doue

Da rei aluzen choazit en ho teuez  
Seiz den a vrud vad ha leun a furnez

Ar c'henta choazet da Ardieler  
a oa Sant Stephan, ar c'henta merzer

Hervez ar vritar, oa leun a furnez  
Dispiar en he feiz, en he vadelezh

Dre nevez he gomzou, dre he viraclou  
Prest e c'hounvezas cals a enev

Kaer ho doa disputha clask argila  
ar Surzevien all a ranke pleza

Dirag ar c'honzeil, tamallet e fo  
Sant Stephan a ia da zifen e goz

Displega a ra dirazho neuze  
Oll madelezon gret gant ho Doue

Daoust da gement se, c'houi pemou kalet  
Kalonou sklasset, c'houi ne zentit ket.

Evel ho tadou, o devoa lazet  
Karmadet Doue hag e brophetet

C'houi o feuz ive ammen sten just lazet  
Mes Doue en deuz he resuscitet

Kerkent e lavar, he visaj joiasas  
Am bre zo digor; me a vel Jesus

Koumaret int oll, hag er meaz a ger  
E stlefont Stephan. Ar c'henta zherger!

Herviz ho lezen, oll braz ha bihan  
A guerner mein da lara Stephan

Ar merzer yaouank a lavar neuze:  
Dec'h, o va Jesus, me ro va ene

Diraz he zaoulin, haga greis calon  
E lavar ive: Poiz dezho pardon.

Mes corf sant Stephan, var am douar noas  
Beuzet he c'hoad a jomas pell bras

Yuseo na bristen na douchas outhan  
Doufanha respect o doa evithan

Al loened mud, hag al labourset  
Ouz ar c'horf ive he dostaint ket

Mes Garnaniel, e veste skolaer  
A reas sebelia korf sante ar merzer

Goude tri c'hant haer ha pevar ugent  
Lucian ar beleg gavas corfou sent

En Ili parres Cafargamala  
Eus nosvezloa, cousket bras dija

Souden, dirazhan ~~he~~ vel fenn eun den  
Korhe da vilet, he visaj laouien

Ha betek teir quech, dre he hano mad!  
Lucian, emezhan, va zelaouit mad!

Duhout, Kreiz ar park a Delagary  
E reuz corpes sent e Kichen va zuz  
Hini Nicodem, hag hini Stefan  
Hag va hini me hag va mab bihan  
Erit distruer mad plas, rente peb unan  
Peder gobbeillers a leste dirazhan  
Unan anezho a roz reuz carget  
A verte Stephan a oa merzeriet

E diou all roz guenn a zinitie  
Oa Gamaliel, Nicodem ive  
Unan arc'hantetka leun a c'houez vad  
a oa Abibas, corf ar potrik mad  
Herruz he gouzou, Lucian a iaz  
Ha fevar archet-eno a gavar  
Pa ou digoret archet sant Stefan  
Ann douar agrin, a spruit peb unan  
Ker bihan am er, eur c'houez vad ha skam  
a ro ar pare d'ar re a zo clam.

Abaoe neuze, am oll dud fidel  
A c'houleme lod eur ar c'houz santel  
Da Jeruzalem ar brassa loden  
Hag am remorant dre ar bed kristen

Memer am elis a ra da Stefan  
Dann c'houel er bla, d'ar re all unan  
De lerc'h Nedaleg, Da zeiz he varo  
D'an tri a vez cost, pe d'ar zuz vardro

Mon tud corz quechall, d'ech en em voettlet  
Pell ha pell amzer d'ho feiz, deuz calchet.

Ken ho madelez e tenit d'hon diouall  
Beuz am tourmant fell hag am avel fall  
Avel ha tourmant aliez a sto  
Var reier kalat a Castet am Caro

Hag fulor ar mor, var aod Flourzoc'h  
D'hoz ann Douard a ia c'hoaz larkoc'h  
Kaer en do Krozal, ha Krozal ato  
Ne c'holois ket ar rouez ho pedo

Hag en ho voassa, biken am tarsion  
Ne c'hallint avel beteg he dreizion  
Paag elis ar kant var veun huelen  
a ho goudoret ive d'ar blenen

Eno, vel eur varann, soureus noz de  
E veill Spuit Stephan var he rugale  
Hic'o d'hor Patron deuz he Bardou  
Lazarouf: bemnoz, bemnoz, a galon.